

UR POLITIKEREZH YEZH EVIT BREIZH

I - DIAGNOSTIK

Meur a yezh zo e Breizh, a-gozh, ha war kement-se eo diazezet identelezh ar vro.

Stad ar brezhoneg zo gwenn ha du war un dro. War zigresk ez a an anaoudegezh eus ar yezh hag an ober ganti, anat eo. Renket eo bet gant an UNESCO e-touez ar yezhoù zo « en arvar bras da vont da get ». Bez' e oa c'hoazh 600 000 a dud o komz brezhoneg e 1983 (16,3 % eus poblañs ar 5 departamant). Ne chome ken nemet 304 000 e-kerzh an niveradeg diwezhañ e 1999 (7,5% eus poblañs Breizh a-bezh met 20% e Breizh-Izel). Ouzhpenn-se e vraskonter 350 000 a dud gouest da gompren brezhoneg hep gellout komz anezhañ. Ar studiadenoù diwezhañ a ziskouez e koller 10 000 brezhoneger bep bloaz rak, evel-just, koshaat a reont : 64% zo tremenet ganto 60 vloaz ha n'eus nemet 4% dindan 40 vloaz ¹.

Koulskoude ez eus peadra da gaout esper. Da gentañ, goude mont war zigresk, niver ar vrezhonegerien a chom uhel a-walc'h ha posupl eo ober gant ar brezhoneg bemdez, e Breizh-Izel da vihanañ. Ouzhpenn-se, ar Vreizhiz a ziskouez bezañ douget muioc'h-muiañ d'o yezh (92 % hervez ar sontadeg diwezhañ) ha niver an dud a-du gant ar c'hlasoù divyezhek a zalc'h da greskiñ. Ar c'hentelioù evit an dud deuet (kentelioù noz pe dre lizher) zo goulenn dezho : 6 000 o teskiñ ha 40 000 desket ganto ar brezhoneg e-giz-se (enklask INSEE 1999). Hag ivez, niver ar vugale er c'hlasoù divyezhek a zalc'h da greskiñ gant nerzh. Seurt nemet er skolioù-mamm hag er skolioù kentañ derez, niver ar skolidi zo aet eus 937 e 1989 da 8 263 e 2003 (e distro-skol Gwengolo), da lavaret eo ur c'hresk a 882% e 14 vloaz (16% bep bloaz). En devezh a hiziv ez eus 9 700 skoliad er c'hlasoù divyezhek, adalek ar skol-vamm betek al lise, e 5 departamant Breizh. Bep bloaz eo bet ar c'hresk en tu all da 10% hag a-wechoù betek 20% evel e 1998. Bep bloaz ivez e vez nac'het gant an Deskadurezh Stad digeriñ klasoù (n'eus ket a-walc'h a vistri stummet da lakaat enno abalamour ma chom sac'het an traoù gant ar velestradurezh pe abalamour ma n'eus ket tud a-walc'h ganto ul live dereat, ne fell ket d'an dud e karg ober pe lod eus ar vistri zo a-enep a-wechoù).

Gwelet a reer an traoù o vont war-raok : ma n'eus nemet 0,8% eus ar re 15-19 vloaz o komz brezhoneg, bezañ zo 3% eus ar re 5-14 vloaz gouest d'e ober ha 4,5% gouest da gompren, e Breizh a-bezh. An niver-se a zalc'ho da vont war gresk. A-benn un nebeud bloavezhioù, an dregantad brezhonegerien dindan 20 vloaz a vo uheloc'h eget hini ar vrezhonegerien en holl (5% eus poblañs Breizh a ra 200 000 a dud). Peadra zo, eta, da gas kalz traoù da benn, gant ma vo graet ar pezh a rank bezañ graet.

An dielfennadur graet ganeomp koulz ha gant an emsav sevenadurel a ziskouez ez eus ezhomm da gaout ur sell politikel hollek war grenn dermen ha war hir dermen, war dachenn Rannvro Breizh. Ar strollegezhioù a c'hoari pep hini eus he zu hag an aliesañ a-frapadoù, hep heuliañ politikerezh diazezet ebet. Dre se, ne weler ket penaos e vo asuret amzer da zont ar brezhoneg.

¹ Ar sifroù-mañ zo tennet, evit ar brasañ, eus an danevell savet gant Ofis ar Brezhoneg « Un dazont evit ar brezhoneg ? » (Here 2002)

Skouer ar c'hendivizad lakaet ouzhpenn er gevrat-steuñv evit diorren an divyezhegezh zo sklaer war ar poent-se. Evit an daou vloavezh tremenet n'eo ket bet dalc'het e engouestl gant ar Stad.

Evel-se, evit an deskadurezh publik, ar rakwel n'eo ket bet dalc'het, dreist-holl evit ar stummañ mistri (diwar 50 rakwelet, 18 zo bet tutaet e 2002 ha 24 e 2003), evit an digeriñ klasoù divyezhek (72 klas a oa da zigeriñ dindan tri bloaz, n'eus bet digoret nemet 51). Re nebeut a geloù a vez roet d'ar familhoù, daoust m'eo aet an traoù war wellaat tamm pe damm.

An arc'hant lakaet gant ar Stad hag ar Rannvro ne ra nemet 30% eus an hollad (ar c'hendivizad zo evit 5 bloaz). Seurt nemet evit an deskadurezh, dregantad an dispign ne sav nemet betek 28%.

Gouzout ar yezh zo un dra, ober ganti bemdez zo un dra all. War ar poent-se ez eus ul labour divent da gas da benn evit ma chomo bev ar brezhoneg e-touez an dud hag er mediaoù. Aet eo an traoù war-raok evit ar pezh a sell ouzh ar panneloù heñchañ divyezhek (e departamant Aodoù-an-Arvor, en hini Penn-ar-Bed hag en un toullad kumunioù) nemet war an hentoù zo d'ar Stad bremañ. War gresk ez a niver ar c'humunioù (dreist holl ar c'hêrioù) a laka war-sav politikerezhioù a-youl.

N'eus, koulz lavaret, netra da zegemer ar vugaligoù e brezhoneg (nemet e Gouenou, Landerne, Kemper). Kalz eus an aozadurioù evel an MJC-MPT, ma lakaont war droad kentelioù brezhoneg, ne vez kavet ganto nag abadenn diduiñ, na staj ebet e brezhoneg. Rouedad Tiez ar Vro zo o kregiñ gant al labour-se hag emeur o stummañ animatourien (60 BAFA e brezhoneg stummet gant an UBAPAR etre 2002 ha 2004).

Heñvel eo evit ar mediaoù bras, evel da skouer France 3 Ouest : plas ar brezhoneg a chom dister enno. TV Breizh, skañv ar yalc'h gantañ, ne c'hell ket bezañ par gant ar pezh a vez graet er broioù keltiek all e yezh ar vro. Ar raktres d'ober anezhañ ur skinwel evit kas war-raok ar brezhoneg ha sevenadur Breizh zo en arvar bras, dre ma ne vez ket roet dezhañ kanolioù hertzian gant ar CSA ha dre ma'z eus bet termet e-pad daou vloaz a-raok harpañ an eilmouezhiañ filmoù.

An div radio hollvrezhonek zo kevredigezhioù anezho, evel ar re divyezhek, nemet France Bleu Breizh Izel e-lec'h ma vez klevet un tammig dereat eus ar yezh. Plas ar brezhoneg er c'hazetennoù pemdeziek zo gwall dreut (ur pennad ur wech ar sizhun en Télégramme hag Ouest-France, hag un nebeud pennadoù da vare ar gouelioù sevenadurel). Gourc'hemennoù d'ar sizhunieg « Le Poher/Ar Poc'hêr » a embann, abaoe nebeut amzer ur bajennad e brezhoneg (hag unan all e saozneg).

Hag ivez, dre ma'z eo bet nac'het gant prezidant ar Republik ober evit ma vefe posupl gwiriekat Karta Europat ar Yezhoù Rannvroel ha Minorel, sinet koulskoude gant gouarnamant Jospin, ar brezhoneg n'en deus, en devezh a hiziv, tamm framm lezennel ebet evit gellout bezañ gwarezet ha diorroet.

Ur yezh romanek dibar da Vreizh eo ar gallaoueg hag ul lodenn eo, evel ar brezhoneg, eus he glad sevenadurel. Hiziv an deiz ar gallaoueg a vez studiet ha kaset war-raok gant kevredigezhioù niverus ha kelennet e vez er skolioù, er skolajoù hag el liseoù. Muioc'h-mui a c'houlenn zo dezhañ a-berzh an dud, met daoust da se ne vez ket gwelet kalz er gevredigezh vodern. Ret eo d'ar strollegezhioù lec'hel ha d'ar Stad gwareziñ glad sevenadurel ar gallaoueg hag aesaat ar studi skiantel anezhañ hag an ober gantañ.

II - DIAZEOÙ DEMOKRATEL UR POLITIKEREZH YEZH DA ZIFENN AR BREZHONEG

Da gentañ eo ret lavaret sklaer tri zra :

1 : Ar politikerezh da zifenn ar brezhoneg n'eo tamm ebet kaset en-dro a-enep ar galleg, kaset eo war-raok e framm an divyezhegezh, a zigor war al liesyezhegezh. N'emañ ket kennebeut o c'hourdrouz unvanded ar vro.

2 : Diazezet eo ar politikerezh yezh da zifenn ar brezhoneg war broudañ an dud etrezek ar brezhoneg ha n'eo ket war ar rediañ anezho. Den ne vo rediet da zeskiñ brezhoneg.

3 : Tra an holl Vreizhiz eo ar brezhoneg ha n'eo ket tra un dornad tud douget dezhañ, ha pa vefe bras o dellid. Dre se e rank ar pennadurezhioù kemer e vuhez e kont en o folitikerezhioù.

Ar politikerezh yezh da zifenn ar brezhoneg zo diazezet war pennaennoù hollvedel an doujañs da liested ar sevenadurioù hag an ingalded etre yezhoù ar bed ha pa vefe kalz a dud o komz anezho pe ne vefe ket, ar c'houzañvusted hag an doujañs ouzh an disheñvelder. Ar pennaennoù-se a servij da ziazezoù d'un toullad testennoù etrebroadel, en o zouez :

➤ Disklêriadur Hollvedel Gwirioù Mab-Den :

« *An hollvedouriezh a rank bezañ diazezet war ur meizadur eus al liested yezhel ha sevenadurel a ya dreist an tuadurioù unvaniñ hag an dougoù d'an digenvez, zo anezho abegoù dispelladur* ».

➤ Karta Europat ar Yezhoù Rannvroel pe Minorel :

« *Diwall ar yezhoù, lod anezho e riskl bras da vont da get, a sikour derc'hel ha diorren an hengounioù ha pinvidigezh sevenadurel an denezh* » (tennet eus raskrid Karta Europat ar Yezhoù Rannvroel pe Minorel, Kuzul Europa, 1992)

➤ An Emglev Ebrebroadel war ar gwirioù keodedel ha politikel gant ar Broadoù Unanet

➤ Kendivizad Gwirioù Mab-den hag ar Frankizoù diazez e Kuzul Europa :

« *Ar gwir da ober gant ur yezh rannvroel pe minorel, er vuhez prevez pe er vuhez publik, zo ur gwir didorrus* »

Dav eo degas da soñj ez eus bet lakaet war droad politikerezhioù da ziwall ha da ziorren ar yezhoù minorel gant al lodenn vrasañ eus broioù Unaniezh Europa. Gant Unaniezh Europa, ha Bro-C'hall enni, e vez goulennet digant ar stadoù a c'houlenn emezelañ d'an Unaniezh bezañ sinet ha gwiriekaet Karta Europat ar Yezhoù minorel, ar pezh a nac'h Frañs ober betek-henn.

➤ Raktres ar Feur-emglev war bonreizh Europa a dabuter bremañ diwar e benn a lavar :

« *An Unaniezh he deus doujañs evit pinvidigezh liested he sevenadurioù hag he yezhoù hag a ra evit ma vo diwallet ha diorroet glad sevenadurel Europa* » (Lodenn I Termenadur ha palioù an Unaniezh)

« *An Unaniezh a ra evit ma c'hello sevenadurioù ar Stadoù ezel en em zispakañ, en doujañs evit o liested vroadel ha rannvroel, en ur lakaat war ziskouez o hêrezh sevenadurel voutin* ».

➤ Parlamant Europa zo o paouez sevel a-du gant ar mennad-se, en ur votiñ, d'ar 4 a viz Gwengolo 2003, un destenn ma tegaser da soñj penaos : « *an doujañs evit al liested yezhel ha sevenadurel zo unan eus pennaennoù diazez Unaniezh Europa, anavezet gant mellad 22 karta ar gwirioù diazez* ».

Ar Parlamant a embann : « *liested ar sevenadurioù zo un dra a-bouez evit startaat al liammoù etre an dud* ».

Erbediñ a ra : « *Ar yezhoù rannvroel ha minorel zo ur vammenn hollbouezus a binvidigezh sevenadurel. Dre-se eo ret skoazellañ anezho dalc'hmat hag e pep live, evel glad sevenadurel an holl* ».

Hag Abou Diouf, bet Prezidant Senegal, a lavar : « *Al liested sevenadurel a zle bezañ ur raktres politikel, unan eus diazezoù ar peoc'h hag ur benveg evit mestroniañ ar bedeladur* »

III - KINNIGOÙ

Gant Kuzul-rannvro Breizh eo anavezet end-ofisiel, e-kichen ar galleg, ar brezhoneg hag ar gallaoueg, yezhoù Breizh.

Dre ar steuñv politikerezh yezh-mañ, hag o klask lakaat ar muiañ ar gwellañ eus e gevelerien e-barzh an taol, dreist-holl pemp departamant Breizh, ar C'huzul-rannvro en em ouestl, emskiantek eus e gargoù, evit ma c'hello yezh ha sevenadur Breizh padout.

Ar palioù

- Reiñ an tu da zerc'hel ha da gas pelloc'h brezhoneg ar bobl, da lavaret eo klask stabilaat niver ar gomzerien.
- Reiñ tro d'an holl Vreizhiz o deus c'hoant, da zeskiñ, da selaou, da gomz ha da lenn brezhoneg.
- Ober ma vo brezhoneg war tachennoù liesseurt ar vuhez sokial e Breizh. Anv zo da gas war-raok an divyezhegezh.
- Reiñ an tu da anavezout ar gallaoueg, broudañ an deskiñ anezhañ ha harpañ an ober gantañ.

Bremañ eo disac'hañ statud lezennel ar brezhoneg

➤ Ne c'hell ket ar brezhoneg tremen hep ur framm lezennel. Ret eo derc'hel da bouezañ evit ma vo gwiriekaet Karta Europat ar Yezhoù Rannvroel ha Minorel hag evit ma vo lakaet war droad lezennoù diabarzh a roio an tu da anavezout ar yezhoù rannvroel, da suraat ar c'helenn divyezhek hanter-hanter ha da zegemer Diwan e-barzh ar servij publik. Kuzul-rannvro Breizh a glasko bodañ ar muiañ ar gwellañ eus ar strollegezhioù lec'hel a sell an dra-se outo evit ma vo gwiriekaet ar Garta.

➤ Kuzul-rannvro Breizh, e framm an arnodiñ, a c'houlenn ma vo kresket e veli war ar sevenadur, gant an arc'hant a vo ezhomm evit lakaat war-sav ur gwir bolitikerezh yezh.

Diouzh un tu all, e vefe dañjerus gortoz ma vo savet ur framm lezennel klok a-raok ober un dra bennak evit ar brezhoneg. Ha posupl eo mont war-raok, dija, war meur a dachenn.

A) Chadenn deskiñ ar yezh

a) Er skolioù

- Diorren ar gelennadurezh divyezhek zo ret evit ma kendalc'ho ar brezhoneg. Kaout 20 000 skoliad er c'hlasoù divyezhek a-benn ar bloavezh 2010 eo ar pal, ar pezh a dalvez mont war gresk eus 12% bep bloaz, ha stummañ mistri niverus a-walc'h.
- Ret eo stummañ 150 kelenner bep bloaz, well-wazh, o kontañ ar guzulieren bedagogel hag an erlec'hidi. Evit se e ranker :
 - Lakaat war-sav ur stummadur a-ratozh evit an danvez-kelennerien, ganto un aotreegezh pe ar c'hevatal, evit en em brientiñ d'ar c'heleñn en div yezh, en ur lakaat an aozadurioù hag o binvioù da labourat a-gevret. Evit ar stummadur-se e vo tu da c'houlenn skoazell arc'hant digant ar Rannvro ;
 - Tuta kelennerien dre genstrivadegoù (gant reolennoù ha divizoù resisaet gwelloc'h) ;
 - Steuñvekaat an tuta erlec'hidi, o reiñ tro dezho da varrekaat (gant heñcherien, hag o reiñ tu dezho da dremen ar c'henstrivadegoù en ur gontañ o skiant-prenet, e doare Talvoudekadur ar skiant-prenet).
- Taolet e vo ar brasañ evezh ouzh ar stummadur war ar yezh evit implijidi n'int ket kelennerien er skolioù, er skoloù hag el liseoù divyezhek, e darempred gant ar strollegezhioù tiriadel hag ar Greizenn vroadel evit ar velestradurezh foran diriadel (CNFPT).
- Ret e vo d'ar C'huzul-rannvro heuliañ pizh ar pezh zo bet divizet e-barzh ar C'hendivizad ouzhpenn. Hemañ a ranko bezañ adwelet, evel ar Gevrat-Steuñv hec'h-unan, abalamour d'an diawel postoù gellout respont da c'houlenn ar familhoù hag ivez da zoujañ d'ar palioù lakaet. Kevelerezh a vo gant ar Rektoriezh, a-benn sevel, evit gwir, kartenn ar skolioù divyezhek. Dezverkoù sevenadus ha boutin a ranko bezañ dibabet evit digeriñ klasoù, war diazez un hentad divyezhek evit pep tachad en-dro d'ur skolaj. Rankout a raio an hentad divyezhek hanter amzer, er skoloù hag el liseoù, bezañ lakaet sklaer adalek an deroù, dre vro, en ur deurel evezh ouzh treuzdougen ar skolidi. A-hend-all e vo ret kelenn ar sevenadur hag ar yezh, evit an deraouidi, koulz er skolioù kentañ derez hag er skoloù pe el liseoù.
- Evit harpañ ar c'humunioù o defe c'hoant, ar C'huzul-rannvro a sikouro gant arc'hant, e framm e bolitikerezh an tiriad, sevel klasoù pe skolioù divyezhek, o terc'hel kont e teu ar skolidi eus meur a gumun. Goulennet e vo skoazell ar Stad ivez, e framm ar c'hendivizad ouzhpenn, pa vez rakwelet gantañ ar rann eus kredadoù en DGE.

Gant ar C'huzul-rannvro e vo deroet kredadoù a-ratozh d'al liseoù publik ha prevez a gelenno brezhoneg pe gallaoueg.
- Evit embann dafar pedagogel ha diorren ostilhoù nevez e vo ret kreskiñ skoaziad ar Stad hag ar Rannvro da d-Ti Embann ar Skolioù (TES), envel en o c'harg ar re o deus labourer e-barzh ha lakaat war droad ur bodad leviañ.
- Evit ar pezh a sell ouzh Diwan, o c'hortoz ma vo gellet e zegemer e-barzh an Deskadurezh Stad (o toujañ d'e zibaboù pedagogel), e vo boulc'het ur gwir genlabour etre ar Rannvro hag ar gevredigezh. Evit se eo ret lakaat an traoù sklaer war daou boent :
 - daoust ha c'hoant Diwan eo mont e-barzh an Deskadurezh Stad, ur wech savet ur framm lezennel dereat evit se ?
 - gant peseurt reolennoù e vo meret an arc'hant evit diazezañ da vat ar skolioù ?

Ur wech ma vo bet sklaeraet kement-se, ar Rannvro a zeuio da sikour adkempouezañ kontoù ar gevredigezh hag ambroug anezhi da vont war-raok, e stumm ur c'hendivizad liesvloaziek. Skoazellet e vo Diwan gant ar Rannvro ivez en he darempredoù gant ar Stad evit dont a-benn da gaout ur statud lezennel.

- Ar stummadur micherel : broudet e vo ar skolidi da vont war micherioù brezhonek er-maez eus bed ar c'helenn (koulz ha deskiñ brezhoneg en hentadoù teknikel).
- Ur politikerezh evit kelenn ar gallaoueg a c'houlenn ma vo lakaet diorren kelenn ar yezh eus ar skol-vamm d'ar skol-veur. Ar pal eo kelenn da vat ar gallaoueg d'ar skolidi ha d'ar studierien, evit ma c'hellfent ober gantañ dre gomz a-zoare.
Er c'hendivizad ouzhpenn, pa vo adwelet, e vo ret lakaat divizoù a-ratozh evit ar gallaoueg, ha dreist-holl :
 - Krouiñ, en UFR "Yezhoù" e Skol-veur Roazhon 2, kentelioù gallaoueg da zibab ;
 - Krouiñ, er skol-veur, ur stummadur hag un diplom arbennik evit kelenn gallaoueg, evit studierien Roazhon 1 ha Roazhon 2. Ar stummadur-se a vefe evit ar studierien o defe c'hoant kelenn gallaoueg, ken er c'hentañ derez ken en eil derez.
- Klasket e vo kenlabourat gant ar Skolioù-meur evit kas war-raok an enklaskoù sokioyezhoniell (yalc'hadoù doktorelezh) a ra diouer bremañ.

b) **Er familhoù**

Unan eus palioù ar politikerezh yezh eo madelezh ar yezh. Ar brezhoneg a zle chom da vezañ ur benveg evit an darempredoù dre gomz etre an dud. Se a dalvez e vo ret derc'hel ul liamm etre ar re o deus desket ar yezh war barlenn o mamm hag ar skolidi er c'hlasoù divyezhek. Brezhoneg ar bobl eo a ranker diwall, gant pinvidigezh ar gerioù, ar pouez-mouezh, an ereadurezh, an doare da intent ar bed hag ar vuhez. Kenlabouret e vo gant Ofis ar Brezhoneg ha gant rouedad Tiez ar Vro evit sevel oberiantizoù da vroudañ an treuzkas er familhoù hag evit dastum glad yezhel Breizh-Uhel ha Breizh-Izel.

Evit niveriñ ingal ar vrezhonegerien, e c'houlenno ar C'huzul-rannvro digant an INSEE lakaat goulennoù war ar yezh en niveridigezh, gant skoazell deknikel Ofis ar Brezhoneg.

c) **Stummadur an oadourien**

Rankout a ra en em ziorren, e-kichen ar skolioù, rak heuliañ ha klokaat a ra anezho. Ur politikerezh a-youl a rank bezañ evitañ, evit ma kreskfe ar goulenn ha ma klotfe ar c'hinnig gantañ. Evit se e ranker kaout tri diviz :

- kreñvaat ar c'houlzadoù kelaouiñ a vez kaset da benn, gant ar strollegezhioù hag an aozadurioù stummañ ;
- lakaat war-sav skoazelloù d'ar stummañ, e framm an diarbennoù zo bremañ : skoazelloù hiniennel pe skoazelloù d'an aozadurioù ;
- micherelaat ar c'helenn ha lakaat da glotañ ar programmoù stummañ zo gant an aozadurioù, a-benn krouiñ un testeni barregezh war ar brezhoneg (o taveiñ da framm boutin Kuzul Europa).

E framm Skol-veur Breizh e vefe brav d'ar skolioù-meur en em glevet evit lakaat e plas un diplom barregezh war ar brezhoneg.

d) **Brudañ**

Ar Rannvro a skoazello, ingal, kas war-raok ha kelaouiñ diwar-benn ar gelennadurezh divyezhek hag ar c'hentelioù evit an oadourien, dre ar radio, an tele hag ar c'hazetennoù.

Kemend-all a c'hello bezañ graet evit ar gallaoueg ivez, ma vez goulenn.

B) Diorren an implij eus ar yezh er vuhez sokial ha foran

Ne zle ket ar brezhoneg bezañ ur yezh desket er skol nemetken. Ret eo komz ha klevout anezhañ war bep tachenn eus buhez ar gevredigezh. Ar strollegezhioù lec'hel, hag en o zouez ar c'humunioù, o deus pouez war ar poent-se. Ret eo ivez d'ar yezh bezañ implijet war dachenn al labour.

a) Ar vuhez sokial ha foran

Ar strollegezhioù lec'hel, hag ar c'humunioù dreist-holl, a c'hello skoulmañ emglevioù gant ar Rannvro evit kas en-dro politikerezhioù divyezhegezh hollek war o zachenn, skoazellañ degemer ar vugaligoù e brezhoneg, sevel oberiantizoù diduiñ (magourioù, kreizennoù dudi, kampoù ha stajoù vakañsoù...), staliañ panelloù heñchañ divyezhek, skignañ paperennoù divyezhek, tuta ha stummañ an implijidi e brezhoneg hag all. Klasket e vo kenlabourat gant an departamantoù evit se.

b) Ar mediaoù

Ar brezhoneg ne c'hello ket chom bev ma ne vez ket skignet ingal gant ar mediaoù modern. Ar C'huzul-rannvro a harpo ar goulennoù evit ma vo roet frekañsoù hertzian d'ar skinwelioù publik ha prevez.

➤ Ar radio

Evit ar pezh a sell ouzh ar radio, ar pal a zle bezañ brezhoneg skignet war Breizh a-bezh. Evit ar poent e vo skoazellet ar re a vez kaset en-dro gant kevredigezhioù hag a genlabour en ur rouedad. Radioioù ar servij publik a vo bountet da ginnig muioc'h a draoù a-feson e brezhoneg (hag e gallaoueg e Breizh-Uhel). Se a vo graet gant emglevioù sinet gant ar C'huzul-rannvro.

Kefridi zo bet roet d'un den barrek, evit studiañ pevar foent :

- frammañ dremm ar radioioù e Breizh ;
- resisaat palioù radioioù lec'hel ar servij publik ;
- diorren plas ar brezhoneg hag ar gallaoueg er 5 departamant ;
- krouiñ implijoù, o'n em harpañ war ur gwir radio rannvroel.

➤ Ar c'hleweled

Sevel ur chadenn tele divyezhek publik evit Breizh a chom ar pal. Hep gortoz, Kuzul-rannvro Breizh a gaozeo gant France 3 evit lakaat da vont war gresk an abadennoù brezhoneg, dreist-holl da eurioù dereat, war ar 5 departamant. An emglev gant France 3 a vo adkempennet evit se, dreist-holl evit kas war-raok ar filmoù faltazi hag an abadennoù evit ar yaouankiz, pa vo daougementet an amzer skignañ gant an tele rannvroel publik a-benn 2008.

War tri ahel e vo labourer da gas war-raok ar c'hleweled er yezhoù rannvroel :

- stummañ tud a vicher war dachenn ar c'hrouiñ (senario, teulfilm, faltazi, magazin, kazetennerezh...). Lakaat ar stummadur-se da vezañ war roll rannvroel ar stajoù, ha da vezañ kaset en-dro gant ar Skol-veur ha gant aozadurioù arbennik, koulz ha gant ensavadurioù kelenn uhel (IUT ha BTS) ;
- skoazellañ ar c'hrouiñ, ar produiñ hag an eilmouezhiañ, dre zivizoù a-ratozh, a-benn bezañ digor d'an holl doareoù krouiñ, ha gant kevredigezhioù ivez.
- Skignañ ha kas war-raok an traoù krouet e brezhoneg, dre veur a zoare skignañ (tele hertzian ha dre fun, troiadoù er salioù sinema, e lec'hioù all, e gouelioù sevenadurel...).

➤ Prederiañ a ranko bezañ graet evit reiñ plas d'ar brezhoneg e-barzh an « TIC », war dachenn ar c'helaouiñ, ar skignañ sevenadurel, ar c'hoarioù dre urzhiataer, e framm al lec'h kevezusted termenet gant ar Poellgor etre ministred evit diorren an tiriad d'ar 14 a viz Gwengolo 2004.

C) Broudañ ar grouidigezh sevenadurel e brezhoneg hag e gallaoueg

E-kreizik-kreiz ar grouidigezh sevenadurel e Breizh emañ ar brezhoneg hag ar gallaoueg. Hervez kampion Breizh ar sonerien daou-ha-daou : « ar yezh hag ar sonerezh zo liammet start...Ar yezh zo mamm d'ar sonerezh ».

Ur perzh diazez a gemeront en identelezh Breizh ha sikour a reont diorroadur un « ekonomiezh ar sevenadur », ar pezh a ro labour d'an dud. Ar C'huzul-rannvro a lakao war ar stern ur « steuñv evit diorren an ijinerezh sevenadurel e Breizh », war skouer ar pezh a reer en Iwerzhon pe e Kembre.

a) Embann

Lakaet e vo war droad ur raktres evit reiñ skoazell d'an embann ha d'ar skignañ levrioù e brezhoneg hag e gallaoueg. Se a vo savet evit an tiez-embann a vicher hag evit ar c'hevredigezhioù.

Roet e vo yalc'hadoù, evit skrivañ ha treiñ, dreist-holl evit ar re yaouank hag ar grennarded. Emglevioù a c'hello bezañ sinet gant an tiez-embann abalamour dezho da ginnig levrioù a bep seurt d'an dud. Evel ma'z eo bet graet gant Kuzul-departamant Penn ar Bed evit ar c'helaouennoù brezhonek evit ar re yaouank, e c'hello ar familhoù bezañ sikouret, e kenlabour gant kevredigezhioù kerent skolidi ar skolioù divyezhek. Sikour a vo kendalc'het da reiñ d'ar c'helaouennoù e brezhoneg.

Skoazellet e vo muioc'h skignerezh ha bruderezh al levrioù e brezhoneg hag e gallaoueg. Kreizenn Rannvroel al Levrioù a c'hello bezañ karget eus ar gefridi-se. Un doare priziañ, diazezet hepken war perzhioù mat an oberennoù a vez c'hoant embann a vo lakaet war-sav. Ar politikerezh rannvroel-se da skoazellañ an embann a vo klokaet gant ar sikour degaset gant an DRAC d'al levraouegoù publik evit prenañ levrioù e brezhoneg.

b) Ar c'hoariva hag ar c'han

Buhez ha doare bevañ ur bobl zo eztaolet gant ar c'hoariva hag ar c'han. Evit ma vevo ar brezhoneg hag ar gallaoueg, e ranker skoazellañ ur c'hoariva bev-buhezek, hag e adstummoù (o lakaat e-barzh ar stummoù komzet hengounel evel ar c'hontadennoù pe ar c'hanaouennoù). En e bolitikerezh yezh, ar C'huzul-rannvro a sikouro :

- stummañ aktourien a vicher ha stummañ war micherioù an arvestoù hag ar c'hontadennoù ;
- ar skrivagnerien e brezhoneg hag e gallaoueg, e framm ar skoazell d'ar skrivañ ;
- ar strolladoù c'hoariva a c'hoari e yezh ar rannvro ;
- lakaat c'hoari ar pezhioù er c'hreizennoù sevenadurel, war al leurennoù broadel hag er gouelioù, dre emglevioù etre an aozadurioù-se hag ar C'huzul-rannvro.

Dre ma kenlabour gant ar Rannvro, e vo goulennet sikour an Deskadurezh Stad evit ma roio harp da vrudañ ar pezhioù-se er skolioù.

Ur skol sonerezh rannvroel a c'hello bezañ savet, e kenlabour gant kevredad al lazoù-kanañ brezhonek, a vo sikouret, evit mirout stumm ar c'han e brezhoneg, evit ober ma vije treuzkaset, hag evit stummañ ar vistri lazoù-kanañ.

D) Reiñ lañs d'an divyezhegezh e servijoù ar Rannvro

- Dilennidi ar Rannvro, ar re zo dedennet gant ar brezhoneg, en em lakao asambles evit sevel ur bodad « politikerezh yezh ». Sevel hag heuliañ a raio politikerezh ar yezh er Rannvro.
- Ur servij « brezhoneg » a vo savet en e garg ober a seurt ma vo kemeret ar brezhoneg e kont, ha brudet, e-barzh holl bolitikerezhioù ar Rannvro.
- Tamm-ha-tamm, lakaet e vo panelloù divyezhek war ar savadurioù hag ar staliadurioù all zo d'ar Rannvro.
- Digoret e vo embannadurioù ha lec'hienn Internet ar Rannvro d'an divyezhegezh.
- Dalc'het e vo kont eus ar brezhoneg evit stummadurioù an implijidi.
- Kreñvaet e vo an darempredoù gant an ensavadurioù sevenadurel pennañ ha sklaeraet palioù pep hini anezho dre emglevioù. Ofis ar Brezhoneg a zeuio da vezañ un « EPCC », e kenlabour gant ar Stad ha gant pemp departamant Breizh, evit solutaat e ziazez evel benveg da lakaat da vont en-dro politikerezh yezh ar rannvro.

E) Lakaat da dalvezout

Ar steuñv-mañ, ennañ hentoù pennañ ur politikerezh yezh evit Breizh, zo kinniget d'ar C'huzul-rannvro da vezañ votet. Lakaet e vo en-dro o terc'hel kont eus an diforc'hioù zo etre ar broioù hag eus ar goulenn a gaver enno e-touez an dud. Un termen a vo roet da bep tra. Ar C'huzul-rannvro a glasko kaout skoazell arc'hant digant Unaniezh Europa evit e bolitikerezh yezh.

F) Priziañ

Evit priziañ bep bloaz kas war-raok ar politikerezh yezh, e vo savet ur bodad mesket, ennañ dileuridi eus ar C'huzul-rannvro hag eus Kuzul Sevenadurel Breizh. Ober a raio, bep bloaz, ur rentañ-kont a vo kinniget d'ar C'huzul-rannvro.